

# KIMIAD

## AR ZOUDARD IAOUANK

---

Tôn : *Itron Zantez Anna.*

### DISKAN

Itron-Varia Rostren, Gwerc'hez ar zoudarded,  
Gret ma vevo en-omp ar zonzj euz hon retred.

1.

Kalon bepred tener, bepred leun a c'hrasou,  
C'hui a reno war-n-omp, Gwerc'hez an armeou.

2.

Eun arme a zo krenv, Mari, c'hui zo krenvoc'h :  
Pa zaviet ho prec'h, piou a drec'ho war-n-oc'h ?

3.

Hon diwallet eta e-pad an tri bla-mâ :  
Ni n'em c'hloestla 'vid mad d'ac'h-hu, mam ar gwellâ.

4.

Hon miret oll divlam, divlam euz ar pec'hed ;  
Hon digaset d'ar ger leun a nerz, a iec'hed.

5.

Kenkent ma vimp distro er vro-mâ war hon c'hiz,  
Ni zeui da zaoulina aman en hoc'h iliz.

6.

Oh ! pegen everuz, oh ! pegen kaer an de,  
Ma c'hallimp dont d'ho ti da laret : Trugare !

7.

Da c'hortoz, ni a vo zoudarded leun a dan,  
Ne grenimp arog den, nag e-ve 'rog Satan.

8.

Ni a viro hon fe, baniel ar gwir gristen ;  
Ha c'hui hon binigo, Itron-Varia Rostren.

J. M.

14 octobre 1892.

**Imprimatur :**

A. CHATTON,

Chaloni, Vikel-vraz.